

En iez breizad, iez va zud koz  
E well blij d'in klevet kana  
Var ann delen fell d'in brema  
Lakat va daouarn da grena  
Diouz ar beure beteg an noz !  
Pell diouzin ha Gall ha Saoz !  
Trouz an delen zo meurbed kaër !  
Ha va spered na vez seder  
Ken var an delen a ganer  
Diouz ar beure beteg an noz !

Pa bâr al loar, a-z-iouc'h d'ar roz !  
Me blij d'in silaou ar biniou  
Hag ive silaou hirvoudou  
'N avel pa c'houez var ar parkou  
Diouz ar beure beteg an noz !

Gwerziou Breizad, vel va zud koz  
'Vid digas earvad 'n em c'halon  
E plich d'in klevet 'n eur pardon  
O sevel 'dreuz d'an oablou dôn ;  
Diouz ar beure beteg an noz !

En iez Breizad, iez va zud koz  
E well blich d'in klevet kana ;  
Var an delen 'fell din brema  
Lakat va daouarn da grena,  
Diouz ar beure beteg an noz !